

**CONCOURS EXTERNE / SECOND CONCOURS INTERNE
DE RECRUTEMENT DE PROFESSEURS DES ÉCOLES
SPÉCIAL LANGUES RÉGIONALES**

BRETON

ÉPREUVE ÉCRITE D'ADMISSIBILITÉ

L'usage de tout ouvrage de référence, de tout dictionnaire et de tout matériel électronique est rigoureusement interdit.

Durée de l'épreuve : 3 heures

Coefficient : 2

– Taol an tamm paper brein-se en tan ha lonk da soubenn, pelloc'h. Ne dommin ket anezhi dit div wech.

Chob an Ti-Gwenn a ouie dre eñvor al linennoù a gloze galv an Emglev. Ar bedervet gwech e oa dezhañ moarvat da lenn ar baperennig skignet gant ar Sindikad, hag en doa kavet e gwask ar stalafioù da greisteiz pa zistroas eus kempenn douar-heiz. Ar c'hentañ gwech avat, e oa da Gatou an Ti-Gwenn sevel he mouezh a-enep he gwaz diwar-benn ar bilhedig ruz-se. [...]

– Da soubenn ? Dal, aze emañ da soubenn, ha dalc'h anezhi ganez ! Ar skritell a zo ganin etre va daouarn a dalv kant gwech ar brignen¹ a zo o yenañ e-barzh va asied. Ya, kant gwech ! Penaos ne vefe ket a fougennout o welet ac'hanon o studiañ paperioù ar Sindikad ?

10 – Paperioù ar Sindikad a lavaran-me ivez ! Diotachoù ha ranerezh ! Traoù a netra mat da sunañ arc'hant diwarnomp ha da lakaat ac'hanout da zebriñ da amzer. Pa soñjan ! Teir sizhun a zo n'ez peus ket tennet da fri diwar ar paperioù brein-se. Gwelet a rez ar bern a zo anezho a-dreñv da gein ? Hepdale ne vo ket gallet digeriñ ar prenestr ganto ken.

– Eeun ! Kerzh atav, dont a ra ganez. Diodez ma 'z out ! Dre sellet ar paperioù-se eo bet digoret 15 din va daoulagad : hag a-drugarez dezho e tigoze ivez ar prenestr war ur vuhez ma vo skarzhet diouti soubenn ar brignen. Warc'hoazh a-raok ar sav-heol e vo stag ar gazez zu ouzh ar c'hastell-eostek², ha d'an eur ma sav Katou an Ti-Gwenn da c'horho he saout, e vin e kroaz-hent Penn-Karront-Ar-Meot, etre Daoulaz hag Ar Faou gant ar re all. [...]

War dro pemp eur hanter, d'ar sav-heol mil nav c'hant c'hwec'h hag hanter-kant, Sadorn, ar 20 Pantekost anezhi, Chob, ur gazeliadig melchon glaz dindan e vrec'h, a storloke e votoù war mein-ruilh porzh an Ti-Gwenn. Katou, uhel he c'hribell, a echue peursilañ al laezh war treuzoù kraou ar saout.

– Chob, emezi, pa vo echu ganez boueta al loened ez i betek kichen al lenn. Va gwalc'hadenn a oa chomet du-se dec'h, e korn ar foeneg. Dindan ar pilgos haleg e kavi ar bouteg.

E keit-se, Visant eus e du a oa krog da cheñch dour e nev mamm ar poñsined. Ar mevel kozh a 25 ouie e labour. Digeriñ war glud ar yer, kargañ ar geuneudeg a vleñchoù, risañ dindan ar c'hezeg ha treiñ an diennerez, setu ar pevar zraig a oa en e garg bep mintin pa save, ugent vloaz 'oa, e tiegezh Karadeged an Ti-Gwenn. Da c'houde, d'ar mare ma kare, e kave e korn an oaled ur skudellad kafe-laezh trempet evitañ.

– Hiziv, a hopas Chob warnañ, a-barzh dijuniañ az peus ur boutegad dilhad da gerc'hat eus 30 kichen al lenn.

Ur vreugnadenn e-giz respont, ha Visant war-du al lenn !... Visant ne gomze morse a vouezh uhel ouzh den, nemet outañ e-unan a-wechoù. [...]

« Daoust hag e soñj da vestrig yaouank an Ti-Gwenn eo aet bouzar-sourd e vevel war zigarez on deuet ponner-glev gant an oad ! Pa 'z eus bet kaoz bremaik gant Katou eus he c'houez, da biv eo 35 bet roet an urzh da ziskenn d'al lenn ? Din-me, pe dezhañ ? N'eus forzh ! Emaon war gwenodenn al lenn, hag an distronkadenn-dilhad a deuio d'ar gêr mare pe vare. [...]

A-raok m'eo bet kaset d'an douar, eizh miz 'zo, korf paour Chob kozh an Ti-Gwenn, ar chatal en tiegezh-mañ a oa holl em c'harg. Ar saout a voude war va lerc'h, an dañvadezed a lipe din va daouarn. Bremañ e tec'hont dirazon, spontet pa welont ar mestr yaouank o sevel e skourjez. An douchenn a 40 zraske e pep tu war o lêr, hag a-wechoù zoken a-us d'am fenn. An amezeien o-unan a chom sebezet. Kement e oa douget an tad d'ar vadelezh, kement e fell d'ar mab bresañ dindan e votoù pep den ha pep tra a zo lakaet izeloc'h egetañ. Lorc'hus, taer, didruez. Ha koulskoude, na pebezh dister a zen ! Gaouier, gwan, dinerzh. Dec'h d'an noz e oa bras an ton gantañ p'edo o lenn paperennig ar Sindikad. Prest e oa ar pabor, Lusifer ma 'z eo, da deurel an daol er-maez. Tamm fougaser ! A-raok ar sav-heol, 45 emezañ, e tlee bezañ e kroaz Penn-Karront-Ar-Meot o vuzulañ an hent gant e gastell-eostek. Met an noz a zo tremenet abaoe: amzer he deus bet ar soroc'hell da goll hec'h avel. Sterniañ a ray e gazez zu, a zo gwir, ar furlukin. N'eo ket ouzh ar c'harr-eost avat, ouzh an oged³ ne lavaran ket. »

Charlez Ar Gall (1921-2010), « Ur Sadornvezh Pantekost », *Brud*, 1957, 108-111.

1 Brignen : greun-edaj malet gros.

2 Kastell-eostek : karr bras evit charreañ an eost.

3 Oged : ostilh evit freuzañ an douar.

I. Goulennoù : respontit gant frazennoù

- 1 - Perak e sav jeu etre Chob ha Katou ? Arguzit en ur zisplegañ savboent pep hini. 3 foent
- 2 - « ... hag a-drugarez dezho e tigo ro ivez ar prenestr war ur vuhez ma vo skarzhet diouti soubenn ar brignen » (l. 15-16). Displegit ar frazenn-mañ. 2 boent
- 3 - Piv a yelo da gerc'hat gwalc'hadenn Katou e-kichen al lenn ? Perak ? 1,5 poent
- 4 - Peseurt doare den eo Visant ? Taolennit anezhañ. 1,5 poent
- 5 - Petra zo cheñchet evitañ en tiegezh abaoe marv an tad ? Perak ? 1,5 poent
- 6 - « Sterniañ a ray e gazeg zu, a zo gwir, ar furlukin. N'eo ket ouzh ar c'harr-eost avat, ouzh an oged ne lavar an ket. » (l. 46-47). Displegit ar frazenn-mañ, ha diwar neuze, petra 'soñj Visant eus e vestr hag eus ar pezh a raio. 2,5 boent
- 7 - Er bloavezhioù 1950 eo bet cheñchet ar maezioù ha buhez al labourerien-douar e Breizh. Diwar lenn an destenn-mañ, displegit petra zo c'hoarvezet a-neuze. 3 foent

II. Troidigezh

- Troit e galleg adalek al linenn 37 : "A-raok m'eo bet kaset d'an douar..." betek al linenn 42 : "...ha pep tra a zo lakaet izeloc'h egetañ." 5 poent